

KIS-819 – Arguzenn Descartes : “*Cogito, ergo sum*”

(GE – 15 05 04)

*Da Jil Ewan (1919-2002), troer Discours de la méthode*¹

A-raok klask denesaat ouzh arguzenn DESCARTES, eo dav ober div pe deir evezhiadenn :

- Evit plediñ gant ur brederouriezh e tere da gentañ kaout un alberz eus an hil ma oa gwriennet ar prederour (DESCARTES a adkeme en e *cogito* un nec’hañs a hente Kornog abaoe Henc’hres, test dodad PARMENIDES : “*Ne c’haller devezout nemet ar pezh a zo.*”) En hil preder azlañset gant ar prederour gall e wriziennas da c’houde holl brederourion Kornog, adalek MAINE DE BIRAN betek KANT, HUSSERL, HEIDEGGER, MERLEAU-PONTY, Gabriel MARCEL, h.a., pep hini o teveizañ, oc’h eilsammañ arguzenn DESCARTES (HUSSERL da skouer a zeuas d’ar Sorbonne e 1929 d’ober ur rummad darlizhennoù talbennet *Cartesianische Meditationen*²). Ne c’hellomp kaout meiz eus ar c’healiouù *doute méthodique, cogito, sum* hep gwriennañ d’hon tro en hil ma ’z int bet dezgeriet.

- Nevezdeuet eo ar brezhoneg war douaroù ar brederouriezh ; n’eus ket eno un digarez evit dianaout an termenoù bet degemeret en testennoù prederel brezhonek ; er c’hontrol, un abeg e ve kentoc’h da gavout enno un diazez izek evit mont pelloc’h. A dra sur, n’emañ ket dreist arzael an termenoù dibabet gant an aozerion vrezhonek ; e degouezhioù ’zo, e tilezer unan pe unan all ; mar en greer avat, e vez bepred dre abegoù soliet a zleer displegañ (da skouer, Jil EWAN en e droidigezh eus *Discours de la méthode*, a dro *cogito* dre e *soñjan* ; divizet e voe dilezel *soñjal* a c’houlenne ul lamm re vras, dre benn e

¹ DESCARTES, *Displeg war an hentenn, brezhoneg gant Jil EWAN. Dianlavar : Ar reizhiad Bred Ene Spered gant Jil EWAN, Preder, Kaier 76-78, Here-Kerzu 1965.*

² Edmund HUSSERL, *Cartesianische Meditationen – Eine Einleitung in die Phänomenologie*, Felix Meiner, Hamburg, 1995 (*Méditations cartésiennes — Introduction à la Phénoménologie*, tr. fr. Gabrielle PEIFFER, Emmanuel LEVINAS, Vrin, Paris, 1953).

arver pemdeziek en laka lieskemeradek betek re, evit degouezhout gant ster prederel *cogito, penser, to think, denken*, ha degemer *dezevout* en e lec'h, dre abegoù o tennañ war un dro da arver dibaot ar verb-mañ, d'ar c'hemeradurioù en doa e krennvrezhoneg ha, betek ur par, d'e geveleboù kembraek hag iwerzhonek — abegoù hor bo tro da arhebiñ pelloc'h).

• Fraezh e tle prezeg ar brederouriezh bezañ, eleze eeun ha resis. Ar bec'h ouzh e intent ne zeu ket eus diaester ar yezh, met eus resisted ar c'healioù. Boutin etre ar yezhoù eo an darn vuiañ eus an termenoù prederel, ma n'eo ket dre o furm, ac'hoel dre o steriegezh : prezeg ur prederour a loc'h bepred diouzh prezeg prederourion all ; mar degas durc'hadurioù ster nevez d'an termenoù ne ra troc'h ebet en istor ar re-mañ : kreskennoù ne lak ken da ziwanañ diouzh an un skod. Pa gomz DESCARTES eus *doute méthodique*, e ra an alamanegerion gant *methodischer Zweifel* ; e reas hon diaraogerion, ha ni d'o heul, gant *arvariñ hentennek* o wiskañ didro war an daou dermen-mañ ur steriegezh bet adeiladet e yezhoù all a-hed kantvedadoù a brederouriezh. Evel just ne vez ket an traoù ken eeun atav. En arguzenn DESCARTES dres e sav kudenn gant dibab ar c'hevatal brezhonek da *sum* : ha graet e vo gant *on, bezan, revezan, hanvezan, eus ac'hanon* ? Ar c'hraf n'eo ket bet skaret betek henn. Aotreet omp da emc'houlenn ha ne zegas ket eno ar brezhoneg un desell a chom e-maez diraez dre ar yezhoù all. Daoust hag an dibab etre ar furmoù-se eus *bout* ne ro ket an dro da ren ur gwir holc'h a brederouriezh ?

Un degouezh evel hemañ a skouera an emsav a vez o prederouriañ dre veur a yezh en ur ser. A skouera ivez ar savlec'h a zifennomp : mar greomp gant ar brezhoneg, ez eo hep mar evit ma teuy da yezh ur gumuniezh, met ivez evit ma talvezo da dud all nad int ket brezhonegerion dre ret : durc'haet omp da amkanioù loet en tu all d'an diforc'hioù a yezh, eleze en tu all d'ar brezhoneg...

Ned eo ket diezhomm kounaat an arroud eus *Displeg war an hentenn* ma tegas DESCARTES arguzenn ar *cogito* :

“Hag en diwezh, goude din merzhout e c'hell holl an hevelep meizennoù a sav ennomp, ha ni dihun, dont dimp kenkoulz all, ha ni kousket, hep na 'vit se da hini anezho bezañ gwir, e ris diwar-benn va mennoz ober evel pa na vije gant an holl bezhioù deuet biskoazh war va spered, brasoc'h gwirded eget na oa gant an touelladurioù o vont d'ober va hunvreoù.

“Nemet endra ma felle din evel se devezout e oa diwir pep pezh, setu me kerkent goude ha teurel pled e ranken, dre ret, ha ME o vout o tezevout se, bout va unan ur pezh bennak. Hag ar wirionezenn da heul : « BOUT E TEZEVAN, RAK-SE BOUT EZ ON », dre ma verzhen ne oa hini ebet eus holl vartezeadoù

*brishañ an arvarourion evit he distroadañ, ken postek ha ken diogel ha ma oa hi, e kavas din e c'hallen hep morc'hed he degemer evel kentañ diazezenn d'ar brederouriezh oan o klask.*³

Kent mont pelloc'h, spisaomp ster *cogito* e prezeg DESCARTES : “*Me zo ur pezh o tezevout*⁴, *eleze oc'h arvariñ, o yaiñ*⁵, *o nac'hañ, oc'h anaout un nebeud, o tianaout kalz, o karout, o kazout, o vennout, o na-vennout, o tec'hmegañ ivez, hag o haeziñ*⁶.⁷” Erdal ledan a roe enta da *cogito*, ken ez intende *cogitatio* evel kenster da *conscientia* : “*Dre ar ger dezevout e veizan kement a c'hoarvez ennomp a-ouez dimp, e doare ma emouezomp outañ*.⁸” War lerc'h DESCARTES e tedroas meizad an dezevout, e voe strishaet e ster d'an anadennoù anaoudel, e-maez an haeziñ hag ar mennout enta ; strishadur a gasas KANT d'e benn pellañ pa grennas erdal an termen d'an ervredañ⁹ ha d'ar poell, eleze d'an aregañ¹⁰ a-gevenep d'an nadiñ : “*Dezevout zo anaout dre ergrafoù*.¹¹” An hil preder hadet gant DESCARTES a zeuas d'e vog gant anadennoniezh HUSSERL ha despizadur an dezevout evel gwezh an emouezañ direet d'ar me trehontel. Dont a reas avat prederouriezh an emouezañ ha tizhout he bevennoù. Aozerion all eus an 20t kantved a lakaas en argraf an ereoù etre dezevout hag emouezañ : FREUD gant an dezevout diemouez,

³ DESCARTES, *id.*, tr. Jil EWAN, *ibid.*, pp. 50-51. Graet 'm eus un nebeut kemmoù e testenn an droidigezh, erlec'hiet *dezevout* ouzh *soñjal* pergen.

⁴ A-zivout *pezh astennat* ha *pezh dezevat*, sl. La-12, pp. 150-151.

⁵ A-zivout *yaiñ* ha *haeriñ*, sl. La-11, p. 95.

⁶ A-zivout *haeziñ*, sl. La-10, pp. 406 hh.

⁷ “Ego sum res cogitans, id est dubitans, affirmans, negans, pauca intelligens, multa ignorans, volens, nolens, imaginans etiam & sentiens” (*Meditationum de prima philosophia*, eil emb. Amsterdam, 1642, Medit. III, 27). “Je suis une chose qui pense, c'est-à-dire qui doute, qui affirme, qui nie, qui connaît peu de choses, qui en ignore beaucoup, qui aime, qui hait, qui veut, qui ne veut pas, qui imagine aussi, et qui sent” (*Méditations métaphysiques*, 1^{re} emb., 1647, Médit. trois., 27) ; sl. ivez *id.*, Quadrige / PUF, 4^e emb. divyezhek, 1996, p. 52.

⁸ “Cogitationis nomine intelligo illa omnia quæ nobis consciis in nobis sunt, quatenus eorum in nobis conscientia est” (*Principia philosophiæ*, 1644).

⁹ Sl. La-10, pp. 437-438.

¹⁰ Sl. La-04, pp. 46-48.

¹¹ “Denken ist das Erkenntnis durch Begriffe” (*Kritik des reinen Vernunft*, Anal., 1. I, Erster Abschnitt).

MERLEAU-PONTY gant an devezout rakdasseltek, ragemouez¹²; ur re anezho, oc'h amc'houl donoc'h gwriennadur, a greizas o freder war ar bout : HEIDEGGER, oc'h addigeriñ erv PARMENIDES, a samme da gefridi dazbriañ an devezout evel loc'hañ etrezek ar bout...

Ne c'hell ket ar brederouriezh tremen hep skoazell ar yezhouriezh : dav eo dimp gouestlañ un nebeut linennoù da istor furmidigezh an hanc'herioù La. *cogito*, Gl. *penser* ha Br. *dezevout*.

- Evel henn e c'haller brastresañ ac'hadur La. *cogito* :

a(go) "lakaat loc'h e, kas war raok ; gwezhiañ ; dezerc'hañ ; ren (buhez)" ;

a(gito) "kas (loened) war raok, reiñ lusk da ; hejañ, kefluskañ, strafuilhañ ; handeiñ, heskinañ ; plediñ gant, embreger ; treiñ er spered, imbourc'hiñ ; amzaelañ ; ren (buhez)" ;

co(a(g "(to "meskañ dre hejañ a-gevret" ;

co#g "(to "treiñ er spered ; soñjal, devezout, derc'hañ, kaout mennoziou, dasselliñ, prederiañ, darvestiñ ; ergediñ, kaout mennadoù".

- Evit ac'hadur Gl. *penser* :

La. *pendo* "lezel e pign skudelloù ar ventel ; pouezañ ; priziañ ; ober stad eus ; dizleañ, paeañ"

iLa. *pensa#re* "pouezañ ; dasselliñ".

- Pell a vezañ ken spis eo ac'hadur Br. *dezevout* :

Hervez ERNAULT : "**Dissiuout** « cuydance, l. secta », *disiuout* « opiner, avoir cuidance », Cb, v. *opinion* ; *diçzivoud*, pl. *ou*, hérésie ; *diçzivoud*, pl. *aou*, secte, multitude attachée à une opinion, *diçzivouder*, novateur, mots surannés, selon Gr. Cf. moy. br. *desevout* penser, *deseu* pensée, auj. léon. *dezo*, résolution, cornique *deseif* désirer, gall. *deisyf*, *deiseb*, demande. J'ai tiré *desevout* du lat. *de* + *sapere*, mais il correspond plutôt à l'irl. *tesbuith*, manquer, *teseba*, qu'il manque, cf. *eseba*, id., de *to* ou *do* (voir *tarauat*), *ex* et *bu* (être) ; voir *ezeuêtt*. Le *b* du gall. *deseib* est dû à l'analogie de mot comme *ateb*, réponse. L'association des sens de « manquer, désirer, demander, penser », est naturelle ; cf. bret. moy. *mennat*, « souhaiter, demander, penser ».¹³"

Hervez FLEURIOT : "**emsiu**¹⁴ [...] gl. « abitionis » [...] Le sens donné à « abitionis », d'après le contexte, est « défaut, faute, déficience, manque ». Il semble y avoir une parenté entre *emsiu* et le gall. moy. *eisseu*, *eissyeu* « manque, besoin », GBGG 463, *eissywet* « egestas » qui a un correspondant

¹² Sl. La-14, pp. 193-194.

¹³ GMB 184.

¹⁴ A-zivout dezneuziadur hBr. *emsiu* hag arver Br. *emsiv*, sl. La-11, pp. 361-363.

dans le vannet. *ezeuet*, *ezeuêtt*, *ezehuaett* « disette », GMB 230, 53-54. Loth RC 37, loc. cit. compare la formation du bret. moy. *esuezaff* « être absent », *esuezans* « absence », DEBM 285, RC 11, 461-2, de l'irl. *esbaid*, *easbaidh* « want, deficiency », composés de *es-*, de **eks-*, et d'une forme du verbe « être », rac. **bheu* ; on trouve la même formation avec d'autres radicaux, ex. irl. anc. *do-es-ta* « is wanting », CCG 329. Notant ces faits, Loth présente, RC 42, 362, sous réserves, une hypothèse séduisante : *eissyeu*, *eissywet*, *ezeuet* seraient formés de *es-*, d'un *s* radical venu des formes en **es* du verbe « être », et d'une particule renforçante, *-eu*, ici *-iu*, de **iwe*, apparentée au sanscrit *iwa*, *i-va*, au latin *-ue* [...] ¹⁵»

Harpet war ar gerentiezh gant Kn. *desevos*, Kb. *deisyf*, Iw. *tesbuith*, *esbaid*, Br. *ezeved*, gerdarzh Br. *dezevout*, mar c'houlakadek ve, a ra d'ar preder treiñ ouzh keal un diouer en anien an devezout — un diouer a vout zoken —, pezh na vank ket a deurel ur goulou digunvez war arguzenn DESCARTES, a du 'rall a gejj a-walc'h gant doazhadurioù ar c'hentañ HEIDEGGER ha J.-P. SARTRE pa ouzer e c'hoarvez hervezo ar buhezañ diazez, nann eus hini ar bout, met eus hini an diouer a vout, an nedeu ¹⁶.

An eil lavarenn, *ergo sum*, ne hañval degas kudenn ebet d'an droerion, ac'hoel e galleg : *donc je suis*, en alamaneg : *also bin ich*, e saozneg : *therefore I exist*. N'eo ket heñvel ar gont gant ar brezhoneg : pe vongevor arverañ ? Jil EWAN a ra gant daou savadur dre ar spiskediell : *rak se bout ez on*, *setu perak ez on* ¹⁷. Merkomp ez arver DESCARTES *sum* hag *existo* evel daou genster ¹⁸.

¹⁵ DGVB 158-159.

¹⁶ Sl. KIS-706 – Al. **Nichts** e preder Heidegger, La-14, pp. 92-115. Menegomp ivez an arroud-mañ gant SARTRE : “*ar ger-se diot ha fallakr gant ho tiouganer, ar « je pense donc je suis » a 'm lakaas da c'houzañv kement — rak seul vui ma tezeven, seul lei e hañvale din bout...*” [“le mot imbécile et criminel de votre prophète, ce « je pense donc je suis » qui m'a tant fait souffrir — car plus je pensais, moins il me semblait être...” (Le sursis, 320)].

¹⁷ *Id.*, *ibid.*, pp. 51-52.

¹⁸ “[...] sit hoc pronuntiatum, *Ego sum, ego existo*, quoties a me profertur, vel mente concipitur, necessario esse verum” (*ibid.*, Médit. II, 19). “[...] que cette proposition : *Je suis, j'existe*, est nécessairement vraie, toutes les fois que je la prononce ou que je la conçois dans mon esprit” (*ibid.*, Médit. seconde, 19).

Hag a-walc'h e ve bet da DESCARTES ouzhpennañ *existere* evit mont hebiou d'an trap ez eo liessteriegezh ar verb *esse* ? Bewech ma 'z a ur yezh war dachenn ar preder e rank talañ ouzh bodeg stank kemeradurioù *esse, être, sein, to be, bout...* HEIDEGGER, goude ober an dro anezho ha stadañ “ez eus kuzhet [a-dreñv *ist*] ur rouantelezh na empenter ket”, a gloz ent diac'hinek dre verkañ “ar goullou a zo hini ar verb bout¹⁹”. C'hoari aes eo d'an dezvarnerion diskuliañ kandreerezh ar brederourion er “rouantelezh kuzh”, ha pa ve ar re-mañ SARTRE pe... DESCARTES :

“*E-barzh L'Être et le néant, Sartre en deus dibabet ar ger être evel an termen andireadus nemetañ. Bep ma 'z eer gant al levr eo diaes festañ resis ster ar ger. Forc'hellek e vez an arverioù, fuilh ar c'hennaroud peurliesañ ha peurliesañ ez eo ar ger être a dalvez e unan penn pe dost da spizañ un arver all eus ar ger être. En desped d'ar c'hendeuzioù ha d'an daremougou e kav din e 'm eus gallet dispartiañ un ugent kemeradur diforc'h.*”²⁰ ”

“*E diouer un dezrann eus ster ar sum, dre ma krede e vez meizet keal ar bout dioutañ e unan, eñ peursklaer hag unkemeraddek, ez ardaol Descartes ouzh ar gouzrec'h dezevat, ouzh ar me, gwerc'helezh pe veziadelezh un dra.*”²¹ ”

O terc'hel kont eus an “emskiant eeunek” en doa DESCARTES ouzh an *esse* — arvarañ a rae war bep tra nemet war ster ar verb *bout* — dre be vongevor e troimp *ergo sum* ? Gwelet hon eus e ra Jil EWAN gant ar spiskediel : “*rak-se bout ez on*”, “*setu perak ez on*”. A-geñver gant an droidigezh-mañ, sellomp penaos eo tremenet e brezhoneg un *ego sum* all, an hini a gaver er *Vulgata* : “*antequam Abraham fieri, ego sum*” (Yn., 8, 58), troet e 1847 : “*araog ma oa Abraham, emoun*”²² ; e 1866 gant AR GONIDEG :

¹⁹ Sl. La-14, p. 109.

²⁰ “Sartre a choisi le mot *être* comme seul terme irréductible dans *L'Être et le néant*. Il est difficile de fixer précisément la signification de ce mot au fil de l'ouvrage. Les usages sont équivoques, le contexte est vague le plus souvent et le plus souvent c'est le mot *être* qui sert presque seul à préciser un autre usage du mot *être*. Malgré les fusions et les interférences, j'ai cru pouvoir isoler une vingtaine de significations distinctes” (R. CHAMPIGNY, *Revue de mét. et de mor.*, avril-juin 1956, 155).

²¹ “Faute d'avoir analysé le sens du *sum*, croyant que la notion d'être se comprend d'elle-même, qu'elle est parfaitement claire et univoque, Descartes attribue au sujet pensant, au moi, la réalité ou l'être d'une chose” (J. MOREAU, *La conscience et l'être*, 105).

²² *Testamant nevez hon Aotrou hag hor Salver Jesus Christ*, Brest, p. 185.

“*abarz ma oa Abraham, édoun*²³”; e 1897 gant ar Pastor Gwilh AR C’HOAD : “*araog ma oe Abraham, emoun*²⁴”, eleze dre ar bongevor leel, e 1904 gant J.-F. CAËR : “*araog ma oue great Abraham, me a zo*²⁵” hag e 1969 gant Maodez GLANNDOUR : “*araok da Abraham bezout, me a zo*²⁶”, dre ar bongevor perzhenel. Greomp enta un distro war luniad bongevorioù *bout* diwar-bouez an daolenn embannet gant SADED²⁷, azveret un disterig :

BEZ <i>reol</i>	EO <i>spiskediel</i>	EUS <i>margediel</i>	EMAÑ <i>leel</i>
	ZO <i>perzhenel</i>		

Orioù reol ar verb *bout* eo an atorioù *boe, bije*, ar c’hevorioù *bez, beze*, ar ragorioù *bo, be*, an anorioù *bout (bezañ), bet* hag an douor *bezet*. En o orin e lak ar Yezhoniezh Ie. **bhew*˘- "kreskiñ, koeñviñ". Furmoù destaget eo ar bongevorioù all, en o zouez an daou gediel *eo, eus* hag ar bongevor perzhenel *zo*, a lakaer araozo Ie. **es*-, orin ivez da hBr.hKb. *is*, Kb. *sydd*, hIw. *is*, La. *est*, Al. *ist*, Sz. *is*, ganto holl an arverioù a anavezer da Br. *bout* evel merk ar vezañs hag evel ereenn. Evit ar bongevor leel, *emañ*, zo deveret diwar un elfenn rakverbel *-ma-*.

Lezomp a-gostez an arver evel ereenn eus *bez, eo, zo, emañ* ha kreizomp hon evezh war arver bongevorioù *bout* evit dec’heriañ keal ar vezañs. Gwelet hon eus an entremar m’emañ troerion an Aviel evit lakaat e brezhoneg ar *sum* e-barzh respont Jezuz d’ar Yuzevion : *emaon, edon, me zo...* Ha kenkoulz all ne ve ket troet : *ez eus ac’hanon ?* Pe or lakaat e genou an hini a ziskler *bezañ* e saviad tralen, eleze en tu-hont da nep davead ? Eus Doue Israel e ra an Torah IHVH, anv andistagadus, anvezadus — lavarout anlavar, doare da ergeñverin ouzh an dreistergeñver — a gred neoazh an

²³ *Bibl santel*, Prud’homme, Sant-Brieg, eil levrenn, p. 489.

²⁴ BKOb. 924.

²⁵ *Ar Pevar Aviel lakeat en unan*, Brest, p. 174.

²⁶ PEAU. 238.

²⁷ Sl. Yad-2 / 1-3.

ezlizhourion intent : *an hini a oa, a zo, a vo*. Diwar neuze dibab furm an droidigezh a vez e dalc'h amselledoù deberzhel, etre re all neuziadurel pe gevreadurel, muioc'h eget e disoc'h an damant d'ur gevazasted dic'hallus.

Saviad hennezh hon eus anavezet c'hoazh. Edon o treiñ, e *Notes de cours 1959-1961* MERLEAU-PONTY, an arroud "un *Seiende qui est ; le Sein n'est pas*"; stadañ a ris ne oa, evit kavout an un furm eus *bout* a-dal d'an div reveziadenn eus *est*, nemet arver ar bongeavor reol : "*ur beziad a vez ; ar Bout ne vez ket*"²⁸.

A dra sur, e talvez desteriadur martezeüs ar pevarnod²⁹ IHVH dre *an hini a veze, a vez, a vezo* koulz ha dre *an hini a oa, a zo, a vo*, evel ma 'z eo ken reizh ha ken reizh ent c'hramadegel *emaon, me zo pe e vezan* a-dal d'ar *sum* eus ar *Vulgata*. Skalfad arverioù ur furm ne vez nepred sonnet ha serr. N'eo ket a-did avat e tebarzher un arver digent d'ur furm gent. An disentez ne c'haller kemer nemet war lerc'h un imboure'h war istor neuziadurel ha kevreadurel ar yezh. En degouezh a studiomp, etre damantoù all, e ranker derc'hel kont eus ar c'hallusted da adkemer ar bomm e troioù kevreadurel all, er savadur-mañ da skouer : *pa lavar Jezuz "emañ / ez eo / e vez a-raok da Abraham bezout..."*³⁰

Distroomp d'ar *sum* gant DESCARTES. Anavezet mat eo linenn e zehentadur : arvarañ a ran war gement tra 'zo nemet war an dra-mañ : arvarañ a ran, ha devezout ez arvaran, ha devezout e tezevan. N'eus e 'm c'herz diended ebet estreget houmañ : *ego cogito, je pense, me a zezev*. Ha dre ouzhpennañ : "*rak-se e vezan*" ne ra, anat dezhañ, nemet dispakañ an diended e rezh un empledad. Rak un *emplegañ* eo an daveadur a lak DESCARTES etre *dezevout* ha *b(ez)out*, un ere poelloniell, jedoniell, n'eo ket ur savelegezh, un *emplegañ* : "*pa lavarar : « Dezevout a ran, rak se e vezan », e verk an termen rak se amzalc'h ar mennozioù hep muiken, ur gentoradezh poelloniell*"³¹. Pe

²⁸ Sl. La-12, p. 193, n.1.

²⁹ Da gevatal da Et. *tetragram(m)*, e tere da 'm meno kemer da stirann Br. *nod*, termen hep kennotadur, kentoc'h eget *arouez(enn)*, o vezañ ma ne lak ket IHVH un ergeñverenn war *ouez*.

³⁰ Evel a ouzer ez arvere Maodez GLANNDOUR *bezout* e ster *existere* ha heuliet eo bet e brezhoneg ar preder. Un abeg ouzhpenn e ve evit dibab amañ ar bongeavor reol.

³¹ Sl. La-10, pp. 325-327.

sol avat zo da hevelep emplegad, da hevelep erganad dienevek³³ ? Ha spiriñ a ra respont : rez d'ar meiz eo, rak evit devezvout e ranker bout da gentañ — un anadurezh a skiant voutin eo. Hogen ar “rez d'ar meiz”, an “anadurezh”, ar “skiant voutin” ne spiront ket da warantiñ un erganad dienevek. A oa mennoz LAVELLE moarvat pa gave gwell erlec'hiañ ouzh *emplegañ* an termen anpoelloniell *enskrivañ* : “An arguzenn « *dezevout a ran, rak se e vezan* » a *enskriv an devezvout er bout ha n'eo ket ar bout en devezvout.*³⁴”

An dezrann eus arguzenn DESCARTES zo dleet dezhañ ober anv ivez eus ar pevare termen anezhi : *ego*. Diskleriañ ar *b(ez)out* evel endalc'het ent poelloniell, entalet gant an *dezevout* a empleg reiñ an un rener d'an daou verb, d'ober eus an un *ego* dangor an *dezevout* ha dangor ar *b(ez)out*. Aze ivez ne ra ket diouer an arbennadennoù : “*Dezevout a ran, rak se ar bout a vez : rak an devezvout a ampleg ar bout. N'en gronn ket ent dezrannel, daveiñ a ra dezhañ.*³⁵” Arzaeladenn troet ken ouzh natur an ere etre *bout* ha *dezevout* hervez DESCARTES [ar frazenn diwezhañ a intentan : *N'en empleg ket, keflen*³⁶ *eo dezhañ*], ken ouzh roll ar *me* en arguzenn : dangor an *dezevout* ne seller mui evel rekizet gant ar *bout*. Dezvarnadenn all : “*Ar bout haeret gant ar Cogito, ar bout dodet ha gwarantet a-gentañ gantañ ne c'hell bezañ nemet bout an devezvout hep mui, ar me o vezañ un arvez anezhañ, an arvez « emouezañ ».*³⁷” “*Ar bout a vez*” erlec'hiet ouzh “*me a vez*”, “*ar me o vezañ un arvez eus an devezvout*”, ha klevout ne reer ket aze ton Jacques LACAN pa lavare eus komz mab den : “*ça parle*” ?

Disheñvel e voe amzaeladur HUSSERL. Pell a glask lezel a-gostez ar *me* ha gantañ riskloù an dangorelouriezh, e kreizas warnañ e sell. O loc'hañ diwar an *ego cogito* e stagas da zispenn roudoù DESCARTES, e daou gemeradur ar

³² “quand on dit : « Je pense, donc je suis », le mot *donc* marque seulement la dépendance des idées, une antériorité logique” (E. BERSOT, *Libre philos.*, 32).

³³ Sl. La-11, pp. 325-326.

³⁴ “L'argument « je pense, donc je suis », inscrit la pensée dans l'être et non pas l'être dans la pensée” (L. LAVELLE, *De l'être*, 138).

³⁵ “Je pense, donc l'être est : car ma pensée exige l'être. Elle ne l'enveloppe pas analytiquement, mais se réfère à lui” (Gabriel MARCEL, *Être et avoir*, 52).

³⁶ Sl. La-09, pp. 244-245.

³⁷ “L'être qu'affirme le *Cogito*, l'être qu'il pose et garantit initialement ne peut être que celui de la pensée sans plus, dont le *Je* n'exprime qu'un aspect, l'aspect « conscience »” (E. LE ROY, *Essai d'une philosophie première*, I, 231).

verb : o heuliañ kammed ha kammed, dizober an divarchoù enno. Da gentañ, ouzh an *arvariñ* ez erlec’hias an *diren*, an *ejpochv*; ne debas ket steuzidigezh ar bed, lakaat a reas ar bed etre krommelloù. Ar bed eo din ar pezh a vuhezan, eleze a gantouezan, a verzhan, a gounan, a zerc’han e mod pe vod, a varnan, a c’hoantaan — gwezhiaoù holl arouezet gant DESCARTES dre ar verb *cogito*. An *ejpochv* zo an emlakaat dreist ar buhezadoù-se en o fezh, paouez a dreiñ ouzh ar pezh a zurc’ha dezhañ va buhezañ evit bukañ va sell war va buhezañ e unan hep muiken — “*neuze e tizhan bout e kement hag ego pur gant froud pur va cogitationes*”³⁸. Evit HUSSERL ivez emañ poent loc’hañ divrall pep prederouriezh en *ego sum*, en “*anated dienevek ar « me a vez »*”³⁹. Kevempleg eo *ego cogito* hag *ego sum* — gant spizañ avat tenor an *ego*. “*« Me a vez, Ego cogito », ne dalvez mui : me, e kement hag an den-mañ den, a vez. Me, n’eo mui ar me o naouiñ outañ e unan evel den en emgantouezañ naturel, na c’hoazh an den bevennet ent goubarel da roadennoù pur an emgantouezañ diabarzh bredoniel rik, an den desellet en e mens sive animus sive intellectus piaouel, na zoken an ene e unan kemeret a-ziforc’h. Er mod-se a erzalc’hiñ « naturel », me hag an holl zenion all a ya da zivoud ar skiantoù soliadell hag ergorel e ster ordinal an termen, evel ar vevoniezh, an denoniezh hag ivez evel just ar vredoniezh. Buhez ar bred, a ra ar vredoniezh anv anezhi, a vez intentet bepred evel buhez ar bred er bed. Kement-se a dalvez ivez anat evit ar vuhez piaouel, hevelep ma c’haller he anc’havaelañ hag he desellout er c’hantouezañ diabarzh rik. Hogen an *ejpochv* anadennoiel a vez ar prederouriad endalc’het dezhi gant kerzh an Darvestadennoù kartekek puraet, a zistalvoud bezoudegezh ar bed ergorel ha dre se he ezkael krak ha krenn diouzh maez ar barnadoù.*”⁴⁰

³⁸ “so gewinne ich mich als das reine Ego mit dem reinen Strom meiner *cogitationes*” (*Cart. Medit.*, l. m., p. 22-23).

³⁹ “der apodiktischen Evidenz des « ich bin »” (*ibid.*, p. 23).

⁴⁰ “« Ich bin, *ego cogito* », so heißt das nicht mehr : Ich, dieser Mensch, bin. Nicht mehr bin ich der sich in der natürlichen Selbsterfahrung als Mensch vorfindende und, in der abstractiven Einschränkung auf die puren Bestände der *inneren*, der rein psychologischen Selbsterfahrung, der seine eigene reine *mens sive animus sive intellectus* vorfindende Mensch bzw. die für sich herausgefaßte Seele selbst. In dieser « natürlichen » Weise apperzipiert, bin ich und sind alle sonstigen Menschen Themen der im gewöhnlichen Sinne objektiven oder positiven Wissenschaften, der Biologie, Anthropologie, darin beschlossen auch der Psychologie. Das Seelenleben, von dem die Psychologie spricht, ist ja allzeit gemeint gewesen und gemeint als Seelenleben in der

HUSSERL ne nac'h ket e vez ar bed, ne arvar ket warnañ — n'eo ket ar Voudoniezh e breder — merkañ a ra ur c'heñver a drehontusted etre ar me hag ar bed. “Evel ma n'eo ket ar me direet un tamm eus ar bed, a-c'hin ned eo ket ar bed na nep ergorenn eus ar bed lodek e 'm me, n'o c'haver ket evel parzhioù gwerc'hek e buhez va emouezañ.⁴¹” Ar me direet ne vez ket damantet war eeun da zevoudoù ar bed, met da zevoudoù an emouezañ. Ne zianavez ket ar bed, er c'hontrol, e amparañ a ra dre ar c'hediñ ster⁴² (*Sinngebung*). “Ar bed ergorel hag a vez evidon, a voe hag a vo evidon gant e holl ergorennoù, a buñs ac'hanon me, a 'm eus lavaret, an holl ster hag an holl vezoudegezh en devez diouzh an dro evidon — ac'hanon me evel me trehontel o tisoc'h a-zigen eus an *ejpochv drehontel-anadennoniel*.⁴³” Alese an diforc'h etre maez an emouezañ, ma c'hoarvez ar c'hediñ ster, ma ampar (*konstituiert*) ar me an devoudoù enmanus ez eo an ergoradoù, ma “puñs ar bed e ster”, hag ar bed ergorel e unan, bed an ergorennoù trehontus, ar gourzhergorioù. *Cogito* an *ego cogitans* (ar *me dezevat*) zo dezevout war ar bed, n'eo ket dezevout ar bed ; ar *cogitatum* (an *dezeved*) zo enmanus d'ar *cogito*. Gant termenoù HUSSERL : an *Noesis* (gwezh ar me trehontel) zo *ergorañ* (emouezañ) *ouzh* ar bed ; enni e toug he amkan, he *Korrelat* (*he c'hendavead*), an *Noema* (an *ergorad*) ; da skouer, pa verzher un dra, emañ an dra merzhet, ar *gourzhergor*, o vezout er bed, trehontus d'an emouezañ, hag adal d'an dra emañ *ergorad* ar verzhadenn, enmanus da vaez an emouezañ.

Welt. Das gilt offenbar auch von dem eigenen, das in der rein inneren Erfahrung erfaßt und betrachtet wird. Aber die phänomenologische *ejpochv*, die der Gang der gereinigten Cartesianischen Meditationen von dem Philosophierenden fordert, inhibiert die Seinsgeltung der objektiven Welt und schaltet sie damit ganz und gar aus dem Urteilsfelde aus” (*ibid.*, pp. 26-27).

⁴¹ “So wie das reduzierte Ich kein Stück der Welt ist, so ist umgekehrt die Welt und jedes weltliche Objekt nicht Stück meines Ich, nicht in meinem Bewußtseinsleben als dessen reeller Teil” (*ibid.*, pp. 27-28).

⁴² A-zivout *kedñ* ha *kedñ ster*, passim dre LAVAR adalek La-10, pp. 397-398.

⁴³ “Die objektive Welt, die für mich ist, die für mich je war und sein wird, je sein kann mit allen ihren Objekten, schöpft, sagte ich, ihren ganzen Sinn und ihre Seinsgeltung, die sie jeweils für mich hat, aus mir selbst, aus mir als dem transzendentalen Ich, dem erst mit der transzendental-phänomenologischen *ejpochv* hervortretenden.” (*ibid.*, p. 27).

War ar poent-mañ, e tiskuilh HUSSERL penaos en deus DESCARTES “*c’hwitet war ar c’horn tro trehontel*”⁴⁴. Evel a ouzer, evit aozer an *Discours*, e c’hoarveze ar bed a zaou solwez kevenep, ar *res cogitans* (pezh dezavat) hag ar *res extensa* (pezh astennat), anezho a-getep an ene hag ar c’horf. Ar pezh dezavat pe c’hoazh *ego cogitans*, e-maez diraez an hollarvariñ, a dalveze da von loc’hañ evit astenn an diarvar a nes da bell d’ar grouadelezh a-bezh (ha da Zoue) dre hent un dezren poelloniell rik — an *ego cogito* o c’hoari roll “*un « aksiomenn » dienevek a dle, dre gevreañ gant aksiomennoù all nad int ket dioueliet c’hoazh ha, diouzh an dro, gant goulakadennoù savelet dre anren, talvout da sol evit ur skiant dezreadel ha displegadel eus ar bed, skiant dezvoniell, skiant ordine geometrico, heñvel kaer ouzh skiantoù jedoniell an natur.*”⁴⁵ Barn a ra HUSSERL seurt dehentadur jedoniell evel un dilerc’h a spered skolastikel na oa ket deuet DESCARTES a-benn da beuremzieubiñ dioutañ, ha lakaat war wel ar poent dik ma saouzas :

“*[...] a nep hent n’eur evit derc’hel evel rez d’ar reiz hor be saveteet en hon me pur dienevek un eskenn eus ar bed, eskenn a ve evit ar me prederouriat ar pezh dreistarvar nemetañ eus ar bed, ha diwar henn e teu-femp a-benn da adc’hounit ar pep all eus ar bed dre zezreadurioù renet reizh hervez pennaennoù enganet an ego.*

“*Se eo siwazh a c’hoarvezas gant Descartes dre berzh ar c’hammad anhenao met feudek a ra eus an ego ur substantia cogitans, ur mens sive animus denel distag, ur bon loc’hañ evit dezastumadoù hervez pennaenn an arbennelezh, en ur ger ar c’hammad a reas eus Descartes tad an enepster prederel ez eo ar werc’helouriezh trehontel.*”⁴⁶

⁴⁴ Titl ar § 10 eus *Cart. Med.* : “*Exkurs. Descartes’ Verfehlen der transzendentalen Wendung.*”

⁴⁵ “ein apodiktisches « Axiom », das im Verein mit aufzuweisenden anderen und dazu evt. induktiv begründeten Hypothesen das Fundament für eine deduktiv erklärende Weltwissenschaft abzugeben habe, eine nomologische Wissenschaft, eine Wissenschaft *ordine geometrico*, eben ähnlich wie die mathematische Naturwissenschaft” (*ibid.*, p. 25).

⁴⁶ “[...] darf es auch keineswegs als selbstverständlich gelten, als ob wir in unserem apodiktischen reinen Ego ein kleines Endchen der Welt gerettet hätten, als das für das philosophierende Ich einzig Unfragliche von der Welt, und daß es nun darauf ankomme, durch recht geleitete Schlußfolgerungen nach den dem Ego eingeborenen Prinzipien die übrige Welt hinzuzuerschließen.

Ur wech c'hoazh, prepoz HUSSERL ne oa ket ar Voudoniezh. Divoud e breder oa an emouezañ — emouezañ embreget gant ar me direet, pur, trehontel, eleze emdennet ennañ e unan war-benn kaout ur sell war embreg hollel an emouezañ ha warnañ hepken ; alese an anvad all lakaet war anadennoniezh HUSSERL : *Egologie, meoniezh*. Bezant eo ar bed e-barzh maez an emouezañ ; a dra sur n'eo ket evel bed gwerc'hel, trael, ergorel, trehontus — e welet hon eus : “*Evel ma n'eo ket ar me direet un tamm eus ar bed, a-c'hin ned eo ket ar bed na nep ergorenn eus ar bed lodek e 'm me*⁴⁷” ; mard eo ar bed bezant, gougevan ouzh maez an emouezañ, ez eo evel ster, e rezh ergoradoù, ambredadoù⁴⁸, anadennoù. Padal, eo kantrat goulenn hag an *Darvestadennoù karteze* a ra an dro glok da arguzenn DESCARTES, daoust ha ne bled ket hepken HUSSERL gant an erganad kentañ, *ego cogito* (a glokaas, gwir eo, gant an amkan *cogitatum*), en ur lezel an eil, *ego sum*, agostez. Arbennet e vo e oa kevempleg evitañ an daou erganad ha dreist-ezhomm oa dougen ar preder war ar *sum*. Rez d'ar meiz ar c'hevempleg, hogen pe sol zo dezhañ ? Hag ar *sum* ne ra ket sevel un argraf a Voudoniezh ? Gant gerioù all : ma n'eo ket ar me trehontel un tamm eus ar bed, pe staelad zo dezhañ ? O vont dre ur prezeg heuz : ma n'emañ ket er bed, pelec'h emañ ? Pe c'hoazh, gant termenoù an Anadennoniezh : “mar bez amparet gant ar me maeziad a-bezh an emouezañ, eleze kement anavezad 'zo, penaos e vez anavezet ar me, eleze penaos ez eo amparet ar me ?⁴⁹” E nep lec'h, pa ouzon, ne ro HUSSERL ar respont. E melladoù diwezhañ an *Darvestadennoù*, ez aked da geñveriañ ar *me naturel* hag ar *me trehontel, pur*. “*En emzalc'h trehontel [...], va me darvestiat en e biaoùded trehontel n'emañ ket kozhet da stuz ur me denel boas, anadenn gendaveat hep mui e diabarzh anadenn vloc'hel ar*

“Leider geht es so bei Descartes, mit der unscheinbaren, aber verhängnisvollen Wendung, die das Ego zur *substantia cogitans*, zur abgetrennten menschlichen *mens sive animus* macht und zum Ausgangsglied für Schlüsse nach dem Kausalprinzip, kurzum der Wendung, durch die er zum Vater des [...] widersinnigen transzendentalen Realismus geworden ist” (*ibid.*, pp. 25-26).

⁴⁷ Sl. p. 316 a-zioc'h.

⁴⁸ A-zivout *ambredañ, ambredad (Intention, Intentionalität)* e preder HUSSERL, sl. La-08, pp. 347-349.

⁴⁹ La-12, p. 98. An destenn a gendalc'h : “Komz a *unanamparadur* ar me evel ma ra ar prederour ne oufe masklañ an dic'hallus ez eo e ve amparet evel un ergorad ar blein eus kement ergorañ 'zo.” Sl. ivez meneg eus keal ar *c'hentamparañ*, La-11, p. 410.

*bed.*⁵⁰ Heñvel dra, pa zeskriv HUSSERL amparadur an hentez (a zo din un *alter ego* en hevelep doare ma 'z eo va me denel boas ivez *alter ego* din) ha pa ra anv eus *etregouzrec'helezh* (*Intersubjektivität*), n'eo nepred ar me trehontel a vez engwezhiet : a-dreist e van hemañ ha kement a c'hoarvez a vez amparet gantañ evel ster, anadenn, e-barzh maez an emouezañ.

A-benn ar fin, d'an aters : “Hag ar me pur, penaos e vez amparet ?”, n'emañ ket an Anadennoniezh en araez da respont — ouzhpennañ a rin n'emañ ket eno he amkan nag he c'hefridi. Ur skiant a venne HUSSERL ober, eleze an deskriverezh hag an displegerezh hentennek eus divoud un diskiblezh *e diabarzh* e vevennoù. Divoud skiant HUSSERL oa an emouezañ ; er-maez eus bevennoù an emouezañ emañ diouzh un tu ar bed, trehontus, diouzh an tu all ar me, trehontel, hag emell an anadennonour ne oa plediñ na gant natur ar bed na gant natur ar me⁵¹. N'eus a atersoù kantrat nemet hemañ : daoust hag anadennoniezh HUSSERL zo ar Brederouriezh, gwell : “*skiant diazez ar brederouriezh*” evel ma skriv e unan⁵² ? Pe, mar krenner ar Brederouriezh d'ar Voudoniezh, mar lakaer ez eo dor ar brederouriezh emc'houlenn “perak ez eus un dra bennak kentoc'h eget netra”, hennezh : daoust hag anadennoniezh HUSSERL zo *ur* brederouriezh ?

Diwar vont, kounaomp ar savlec'h a gemeras e-keñver an *ego cogito* daou eus an aozerion hon eus bet tro da studiañ er bloavezhioù tremenet.

Julia KRISTEVA a bled ivez gant kudenn amparadur ar me : “*Ha ne zleer ket kentoc'h lakaat en argraf pezh a genderc'h ar « me » kentoc'h eget gwezhiadennoù an kez « me » ?*” ha respont a ra : “*Hevelep aters, pell a lakaat ar « me » barniat evel orin, ne ra evidomp nemet loañ an dodadel hag ar c'hoaladel evel diabarzh da argerzh ar sterelaat [...]*”⁵³ Ober a ra “*argerzh ar sterelaat*” (“*le procès de la signifiance*”) eus dispakadur daelerezhek an nerzhoù naturel, alvezel, bevedel, bredel, lavarel ha kevredigezhel hervez ar

⁵⁰ “In der transzendentalen Einstellung [...] ist aber mein — des Meditierenden — Ego in seiner transzendentalen Eigenheit nicht das auf ein bloßes Korrelatphänomen reduzierte gewöhnliche Menschen-Ich innerhalb des Gesamtphänomens der Welt” (*ibid.*, p. 96).

⁵¹ Mar lezomp a-gostez keal *kentamparañ* (*Protokonstitution*) ar me, frouezh un temptadur boudoniellour, n'en devoe nepred ul lec'h bras e preder HUSSERL.

⁵² “Grundwissenschaft der Philosophie” (*Ideen I*, Einleitung, 3 [1]).

⁵³ Sl. KIS-646 – E sigur ul levr gant Julia Kristeva, La-13, pp. 102-118 ; emañ an arroud meneget p. 115 ; a-zivout “*argerzh ar sterelaat*”, sl. pp. 111-112.

“saveleñnoù” dizoloet gant MARX ha FREUD. Hep skorpul ez ebarzh ergrafoù diazez anadenñoniezh HUSSERL evel an *dodiñ* (*Thesis*) hag ar *c’hoaliñ* (*Doxa*) en danvezelouriezh daelerezhek, ez erlec’h ar c’henderc’hañ armerzhel ouzh an amparañ trehontel. Ha ne ve ket ar “*furieuse d’intelligence*” e tiskler bezañ Julia KRISTEVA gwall nes he frepoz da flipadenn Carl VOGT : “*An empenn a vorc’h an dezevoù evel ma vorc’h an avu ar vestl*” ?

E penn all ar skalfad, Michel HENRY⁵⁴ a stag an talbenn *Anadenñoniezh* ouzh e imbourc’h, war-bouez ur strishadenn : DESCARTES eo diazezer gwirion an Anadenñoniezh ; krediñ a reas goulakaat e oa “faos an holl draoù a wele”, tra ma tremen HUSSERL gant “lakaat ar bed etre krommelloù” hep mui. Michel HENRY a nac’h deveizañ an hollarvariñ kartekek evel tun da saveteiñ ur vruzunenn ved ha d’ober neuze eus an *ego* ur bon dienevek evit addiazezañ ar bed en e bezh *ordine geometrico*. Neoazh, pell a gouezhañ evit kelo en “enepster prederel ez eo ar werc’helouriezh trehontel” diawelet gant HUSSERL, e steuñv un doazhadur hiron a ve kentoc’h un “angwerc’helouriezh kevrinel” ; erlec’hiañ a ra ur “*c’hantaezañ kentañ*” ouzh ar *cogito*, un “*emhaeziñ*” ouzh an *emouezañ*, ken e kemerfe a-walc’h gantañ arguzenn DESCARTES ar furm *ego sentio*... Evit a sell amparadur ar me, ne oufe Michel HENRY gwelout eno danvez un argraf : krouet eo an *ego* gant Doue ; kenkoulz all a-zivout keñver ar me ouzh ar bed, emañ ar respont en Aviel : “*N’on ket eus ar bed*”, barnet evel un tamm mat klokoc’h, soliusoc’h eget erganad HUSSERL : “*N’eo ket ar me un tamm eus ar bed.*” E-doug kantvedoù he deus studi ar Skritur emvataet eus lavar ar Brederouriezh. Evit mad piv lazhañ hiziv ar Brederouriezh ha fitchañ un Deologiezh gant he dibourc’h ?



Andoniet eo redennoù pennañ prederouriezh Kornog e kentread an disparti etre ar me oc’h anaout hag e anavezad, etre an *ego cogito* hag e *cogitatum*, etre me ar prederour hag e breder. Biskoazh avat n’eo bet plaenaet skoilh an dic’hallus eo gougevaniñ ar me oc’h anaout, o tezevout, o prederouriañ ouzh e anavezad, e zezeved, e breder. Un amforzh eo an *emanaout me va unan*, rak ar *me va unan* da anaout a rekiz dalc’hmat ur *me* anavezad — an *ego* ne c’hell emanaout nemet dre emzizoublañ etre *ego*

⁵⁴ Sl. KIS-563 – Ar preder hag ar feiz gant Michel Henry, La-11, pp. 405-416.

anavezer a-dal da *ego* anavezet, evel *ego* a rank souzañ evit emgavout dirazañ e unan, eleze dirak un *alter ego*⁵⁵. An *ego cogitans*, kaset d'e gilvac'h olañ, ar *me pur*, ne c'haller nemet ober anv anezhañ, dres evel ma reer "anv" eus IHVH, n'eur ket evit parañ ar selloù warnañ : sellout outañ a ve e zegas da renk un ergorenn pa vez ar *me pur* dangorenn dreist diraez⁵⁶.

Tro hon eus bet e LAVAR da gaout un alberz eus prederourion gornogat all o deus troet kein da amforzh ar *me trehontel* hag ivez eus prederourion japanat o deus diorreet ur preder hep derc'hel kont eus arguzenn DESCARTES.

O vont war enep krenn da zehentadur DESCARTES ha HUSSERL, e strivas MERLEAU-PONTY da ziverkañ ar *me* hag e wezhioù, an ergorañ, an diren anadennoniel ha nep bevonn etre *me* ha bed. Ar c'healioù oc'h eskoriñ e kerz e holc'h zo "*unded rakdassellet ha ragergorel va c'horf*", "*ar c'hreud [...] n'en deus anv e prederouriezh ebet*"; va c'horf hag an traoù o c'hoarvezout eus an un "elfenn" erouez dezhi he unan : "*pelec'h lakaat ar bevonn etre bed ha korf, pa 'z eo ar bed kreud ?*" "*Ar gwelour o vezañ luget er pezh a wel, ez emwel e unan c'hoazh [...]* ; ar gwelout embreget gantañ [zo] gouzañvet gantañ ivez a-berzh an traoù...⁵⁷" Ha pelloc'h e c'haller mont diouzh an "*ego cogito, ergo ego sum, sive existo*" ha diouzh ar "*me trehontel nad eo ket ar bed na nep ergorenn eus ar bed lodek ennañ*" ?

Ne souezhin den o tiskleriañ ez eo saouzanus rañvedoù an devezout gant HEIDEGGER. Kentañ stadadenn d'ober eo ne dro ket kein da arguzenn DESCARTES. En eneb, e holl aked a lak da zoonat he ster dre he adsavlec'hiañ diouzh hêrezh ARISTOTELES : "*dangor (υποκειμενον) [an] dodiañ diazez matematek rik [eo] ar Me*"; "*ar sum n'eo ket un dianlenad eus an devezout, bez' ez eo en eneb ar sol, ar fundamentum*

⁵⁵ Sl. p. 318 a-zioc'h ; sl. ivez *Cart. Med.*, § 44, ma teskriv HUSSERL an *eil ego* (*das zweite Ego*) e rezh *alter ego* amparet gant an *ego trehontel*.

⁵⁶ War se, sl. La-09, pp. 13-14 ; ivez La-16, p. 249, n. 18 ma lenner an arroud-mañ eus an *Ideen* : "*hevelep me zo ar me pur na c'hell ket an direadur kaout krap warnañ. [...] bez' ez eo andeskrivadus ennañ hag evitañ : me pur ha netra ken*".

⁵⁷ Sl. KIS-524 – Keal ar c'hreud e preder Merleau-Ponty, La-11, pp. 115-130 ; an arroudou meneget a gaver, gant o zestenn orin, pp. 125-126.

*anezhañ*⁵⁸”. Evel a ouzer e pellaas HEIDEGGER diouzh HUSSERL, n’eo ket dre zisteurel pe dre ziorzhañ doazhadur e vestr : e berr, tra ma stie hemañ e zarvestadennoù war ar *cogito* (an *Noesis*, ar *Bewußtsein*), e ouestle an diskibl e vuhez d’ar *sum* (ar *Sein* hag... an *Nichts*). Mechal ha HUSSERL en defe kensinet dodadoù evel hemañ : “*E-barzh bout ar beziat e c’hoarvez nedevañ an Nedev*⁵⁹”; ent diac’hinek avat, en dije marteze HEIDEGGER emglevet aesoc’h gant an DESCARTES a skrive : “*Dre skiant prenet e ouzon [...] ez on evel ur c’hreiz etre ar boud hag an neant, [...] etre ar boud dreist hag an anvoud.*⁶⁰”

Er-maez eus holgant kefredel ARISTOTELES ha DESCARTES, hep e zianaout evelkent, e tispake ur greizenn breder birvidik e Japan an 20^t kantved. Ur brastres ’m eus klasket ober eus “skol Kyo#to” dre ouestlañ un dornad pajennoù d’an ambilher anezhi, NISHIDA, ha d’e ziskibl, TANABE⁶¹.

Unan eus pennañ dodennoù NISHIDA oa “*emzislavar an an-un*⁶²”, erzerc’h war hon bed pa vez kenweet ar bed ma vevomp ha ma wezhiomp hag ar bed ma kas ar genel d’ar mervel, dislavar hennezh stadet e Kornog ivez, dodennet ma voe gant PASCAL, KIERKEGAARD, HEIDEGGER. Diwarnañ avat e voulc’h ar Japanad ur c’herzh dic’hortoz evidomp, a-gendon gant ar speredegzh voudaek ; ne loc’h ket diwar bezout ar *me*, diwar an dangorenn, ar *sum*, sol dienevek ar *cogito* : dibab a ra hent nac’hadur an dangorenn o tifourkañ en *na-vout*. Ar poent loc’hañ evitañ eo “*an ampoent ma weler ur furm pe ma klever ur sten, a-raok d’un dangorenn ha d’un ergorenn bezañ*”; ampoent ar *c’hantouezañ pur*, an *anlouerañ*⁶³. Lennerion MERLEAU-PONTY ne gavont ket digunvez un hevelep keal ken tost d’ar pezh a ra anezhañ

⁵⁸ Sl. KIS-584 – Dangor hag ergor adarre..., La-12, pp. 128-140 ; an arroudoù meneget a gaver pp. 129-130, an destenn orin anezho, pp. 137-138.

⁵⁹ “Im Sein des Seienden geschieht das Nischen des Nichts” (*Was ist Metaphysik*, p. 38), sl. KIS-706 – Al. *Nichts* e preder Heidegger, La-14, pp. 92-115 ; an arroud meneget, p. 99, an destenn orin anezhañ, p. 112.

⁶⁰ *Quatrième méditation*, IX A, 43, arroud meneget ha testenn orin, La-14, p. 106.

⁶¹ Sl. Denesaat ouzh skol Kyo#to. KIS-726 – I. Nishida Kitaro#, pp. 218-243. KIS-730 – II. Tanabe Hajime, La-14, pp. 275-310.

⁶² Sl. La-14, p. 220.

⁶³ *Id.*, p. 222.

“*buhezadoù ar c’hreud*”⁶⁴. Gant an ankou e voe miret ar prederour gall a zispakañ ar “brederouriezh a ’r c’hreud” a erbare, tra m’en doa e genvreur henañ roet endeo lec’h d’an *anlouerañ* en e voudoniezh, en e “navoudoniezh” kentoc’h, ouzh e eztaoliñ e furm emzislavaroù : “*an « anlouerañ » e kement ha henn n’eus ket anezhañ [...], an anlouerañ zo ar werc’helezh nemeti*”⁶⁵; “*emañ ar « me zo me » ereet ent vonel ouzh « n’eus me ebet »*”⁶⁶...

E gwir, ne ve fin ebet da ezrevellañ an aozerion o deus diorreet o devezout er-maez eus hil ar *cogito* kartezeke. Ne venegin nemet ECKHART en 13-14t kantved a haere ez eo ken gwir ha ken faos ober eus Doue un *ens* pe un *nihil* ha LEVINAS en 20t na derme ket evit diazezañ e breder war an *estreget bout*, afer wirion an den hervezañ⁶⁷.

⁶⁴ “*expériences de la chair*” (sl. La-11, pp. 120-121).

⁶⁵ Sl. La-14, p. 223.

⁶⁶ *Id.*, p. 231.

⁶⁷ Daveoù da ECKHART ha da LEVINAS, *passim* eus La-11 da La-14 (La-14, p. 123 pergen). Kounaomp eo LEVINAS a droas e galleg *Cartesianische Meditationen*.